

RELATION

Veritabl ha profitabl evit an oll da ober reparation
da Zoue demeus, ar sacrilejou ha profanationou a
goumeter a enep e Kajeste, abalamour d'ar c'hrimou
coumetet er blos-mâ gant pévar den maleürus e parres
Sant-Georch, tost da Libourn, én escopti Bourdel.

Var ton Cantic an Eternite.

EN hano Doué, christenien, tostaït da glêvet
Maleuriou ar re vrassa a zo bet c'hoarvezet
Gant pévar den dirollet coumetet ar blos-mâ ;
Lacat a reont an eê, en douar da grena.

Qent commanç e c'houlennâñ pardon digant Done,
Eus ar Verc'hes glorîns, Zent hac an Ele;
Gant aoun rac justic Doue ne zeue d'am punissas,
Va c'halon ous e gompréñ a zéu d'en em ranna.

Ennoc'h, Mam truezis, e lacàn va esperanç
Evit ma em bezo digant Doue asistanc,
Ma hellin dre ho siccour cavet ar sclérigen
Da explica qement-mâ etouez ar gristenien.

Mont a rân da goumanç disclêria en antier,
Pa ro dîn asistanc va Doue hor Salver,
Ar maleuriou erruet en escopti Bourdel,
Er barres eus a Sant-Georch, an uguent a ebrek.

Er barres-se e voa ur Person, un den sautel,
A asiste ar beorien gant ur galon fidel,
Dre ma voa carguet ar vro a guernez ha miser,
E soulage ar paour balamour d'hor Zalver.

Pêvar den maleürus, goude dibri o danvè,
Renoncet da Jesus, abandonet o ene,
Evit servicha Satan leuni a fallagriez
A lacas en o speret da venet dà laëres.



Ar pêvar brigant-mâ a goncluas neuze
 Dont da dy ar Person , pa vouient an doare :
 Gantân emâ aq alc'hoësiou detneus ar sacristiri ,
 Ha ny a yêlo en nôs da laërez an Iis.

Clêvet pebes ardou o deveus invantet
 Abers an drouc-speret evit na vint qet anavezet ,
 Mont da brena cos dillat , en em guisca en bevien ,
 Ha mont da dy ar Person da c'houlen an aluzen .

Ar Person carantezus o recevas neuze
 Evel memprôn Jesus en e dy gant caranse ,
 A roas dezo da goania , hac en deus o loget ,
 Hep consideri ar soncheus an dud miliget .

Ous en em gonclui , hep sonjal d'ar repos ,
 Neuze in bet savet vardo an anter-nos ,
 Forcet o deus ar gampr elec'h edo ar'mevel ,
 Hac o deus-én massagret eus a doliou countel .

Neuze teujont d'ar plac'h coussqet en e gouele ,
 O deus-hi massacret hep caout outi true ;
 Beuzet oll'en e goad , astennet var leur an ty ,
 Ha lajet en ur bern hac ar mevel hac hi .

Neuze o deus pignet ebars cambr ar Person ,
 O deus-én garotet hep caout compassion ,
 Staguet en ur gador hac e dreid bars en tan ,
 Læret an ale'houeziou qemeret digantân :

Hac o deveus laeret an oll arc'hantiri ,
 Ar pêvar maleürus a yas d'ar sacristiri ,
 Croasiou arc'hant , lampr , calizr , hac ezancquerou ,
 Chapou , ornamanchou eus an oll auteriou .

Ar pêvar maleürus gant an diaoul possedet ,
 A yas d'attaqi Jesus en tabernacl beniguet ;
 Ar soleil , ar ciboar o deveus qemeret ,
 An hostiou adorabl o deveus profanet .

Gouelomp oll , tud devot pere a gar Jesus ,
 O velet un torset cruel ha maleürus ,

Pini laça an êc , an douar da grená;
Selaci a ra va goad , n'allán mui explica.

Crena ra va c'halon o velet an dud'maleürus
O foulí gant o zreid cors santel va Jésus ;
Ne oún pénaus Doue pa zeu d'o funissa ,
Pe diguerl an douar evit crenn o lounca.

Holla ! tud maleürus , bournrevien arraget ,
Pétra rit da gorf Jesus eu deveus hò crouet ?
Goassoë'h oc'h vit Judas pehini zo daonet ,
D'attaqi var e dron hor Zalver beniguet.

Retorn a ra breinàn ar pêvar den cruel
Da zisques d'ar Person an ornamanchou santel ;
En instant m'o guelas , e rannas e galon ,
Ma commanças d'ober dezo instruction.

An den santel affliget a layaras deze :
Pa n'oc'h eus aoun razòn , bezit ous justic Doue .
An arrach en o c'halon a zo het antreet ,
Hac unan gant ur gontel en deus-én dibenuet.

E beun santel hac e gorfo deveus bet taolet
Ebars en un tan bras evit heza dêvet ,
O soujal penus biqen na vijent disoloet :
E vontr aour , e arc'hant o deveus bet laëret.

Mes Doue , ous pehini ne zeus netra cuzet ,
A bermetas ma vijc o c'harimou anavezet ,
Ma teuas eus ar barres daou-den en un instant
Da glasq an autrou Person da gac er Sacramant.

An dud-mâ pa veljont an dorojou digoret ,
Hac an ty leùn a c'hood , o c'halon zo rannet ;
Mont rejont d'avertissa an oll amezeyen ;
Ma teuas prest gante vardro daou-uguent den.

Pa antrejont en ty , o c'halon zo rannet
O velet an tan bras piui voa alumet ;
Hac ar Person en e greiz a voa cazi dêvet ,
Ar plac'h hac ar mevel en o goad astcunet.

Garçotet voent neuze hep caout compassion,
 Cunduef da Libourn ha laqet er prison,
 Aben seiteç deiç goude o froces zo juget,
 Dre arrêt ar parlamant da vezà punisset.

Condaonet voent neuze gant parlament Bourdel
 Da gaout ar guistion vit o c'hriñou cruel,
 Rostet betec o daoulin, truez voa o c'hlêvet
 O crial, o vouela, oc'h ansao o sec'het.

Neuze voent condaonet ar pêvar den miserabl
 Gant torchou alumet d'ober amand enorabl ;
 Gant un durques o ivinou d'zo a voe tennet,
 Ha troc'het o biziet, truez voa o c'hêvet.

Neuze var ar blacen e voent bet cunduet,
 Laqet en o c'herc'hen peb a rochet souffret,
 Laqet e pêvar dan evit beza dévet,
 Hac al-ludu anezo gant an ayel guentet.

Choui, tadou ha mamou o deveus bugale,
 Disqet-o da veva e carante Doue,
 Evit, goude'r maro, ma zeot oll da repos
 Gant Lent hac an Æles e gloar ar Barados.



CANTIC SPIRITUEL

Var sujet Apparition ar VERC'HES en Escpti a Artois, an devez qenta a vis Even 1768.

Var ton : Guerz Sant Ugen.

M Eulet ra vezò an Dindet, Tad, Mab, ha Sperei-Santel,
 Ha c'houi ive, Guerc'hes fidel, pa oc'h eus en em
 apparisset

C'hoas etoues ar gristenien, evit gallout o zouten.

Aboe moc'h eus ganet ho Mab ebars ur c'hraou distér,
 Biscoas den e nep carter n'en devoe'n enor d'ho quelet,

Nemet er blos-màn eurus oc'h en' em disqueset, Mam
Jesus.

Didostait amâ; christenien, c'houi tud devot da Vari,
Da renta ho meuleudi d'ar rouanes souveren,
En escopti a Artois en deveus laqet calz a joa.

'Er vilagen eus a Moutier un den honest bras meurbet,
Pinvidic bras en effet, pehini a gare Doue,
E joa voa da soulagi ar beorien en o annui.

Solvui ma roe an aluzen, selvui e cresqe e zanve,
Benediction Doue zo varnez a dra certen,
Pa soulage ar mewprou eus a Jesus hon Autrou.

An den-mâ en devoa pedet gerent hac amezeyen,
An deiz qenta a vis éven, da zont da ober ur banquet
Eus ur c'bontrat en devoa da zimizi ur map dezâ.

Pa edo ar gompagnunez tout ous an dol o coania,
E teuas da c'houlen loja hor mam biniguet ar Verc'hes,
Hep beza anavezet, rac paour bras e voa guisquet.

Etre e divrec'h e tougue oll joaustet au Ele;
Silvidiguez ar bed-oll, Jesus-Christ guir vap da Zoue;
Gant ur visach caér ha charmant, ha paour bras, e
guiscamant.

En instant m'e deus goulemnet digant ar mæsir
eus an ty,
Va logit, me ho suppli, evit un nos, mar permetet,
Elec'h ma vo ho polonje, paet viot gant Dose.

An den-mâ leun a garante en andret ar beorien guez
En deus lavaret d'ar Verc'hes : ya, hep ma e anaye,
Ya, emezân, deut en ty, me lojo ho mabic ha c'houi.

Dre an dorn en devoa-y qemeret, ha laqet da azeza;
E-unau a guemeras Jesus hor Zalver biniguet,
D'e lacat var e varlen; hemâu an enor, christenien !

Solvui ma sell ouz ar c'hrouadur, selvui caëroc'h
er c'hâve,
Ravisset voa tene, e galon zo en plijadur,

O velet ur mabic quer charmant, quer caér, quer ravissant.

E-unan e deveus-y pedet : debret, ivez emezàn,
Mes hy en trugareca, ne devoa na naon na sec'het ;
Mes calz a blijadurez o velet ar gompagnuez.

Pa voa ar repas achuet, e c'houlennas diganti :
Leveret, me ho suppli, a belec'h oc'h, mar pernietet,
Ha pez hano oc'h hanvet, iye da belec'h e zet.

A noblanç vras oun, emezi, guinidic a Galilee,
Evit lavaret ar virioneg, a dra sur oun hanvet Mari,
Hac e zou deut gaît va map, da zigaç ur c'hélou mat.

Ur mignon ameusemezi, a dle caout un heritach,
Ha c'hoas ive davantach, ar propriete bars en e dy,
Pa zeo bet trugarezuz en andret memprou Jesus.

Ar rezo o deveus pedet ha gounezet evita
An heriritach ar c'heirz, peñui a dle da gaouet
Qent m'achuo an eiz de, songet mad e qementse.

An den-màn hep beza songet neuz bars ar recit-ze
Qer profitabl d'e ene, outi en devens goulcnuet.
Ha bras voa ar baourente dre ar vro ma tremene.

Peguement benac, emezi e zeo fachet hon Doue
Ous ar pec'her, nos ha de ne ra fiemel e offanci,
Eo prest c'hoas da rîi pardon, mar goulennont a galon.

Ebourvoar hac e vadelez zo en tu-all d'ar valiç ;
Mar meritomp ar supilç, ema c'hoas leun a vadelez,
Ne vanq qet da fournissa peadra evit beva.

Ar gurun en deus gourdrouset ha rivinet o tier,
Ar grisil-hac an avel en deus iffamet ar c'charter,
Ar glao hac an dour quer bras ne voe guelet ennân hiscoa
Un nombr bras a vatimanchou a zo collet dre ar mor,
Hep gallout en em sicour, ar maro subit a veler
O caç hoc'h amezeyen d'an douar a dra certen.

En ur guer, brezel ha quernez a veler dre ar charter,
Hac ive qement malheur pere a erru gant ar pecher,
Zo avertissamanchou a erru abeurs hon Autrou.

Mes va mignon , me ho suppli , dalc'hit sonch eus
va c'homzou ,

N'int qet faribolennou pere a alset da ziferi ,
Gant Doue int lavaret da ziscléria var ar bed.

Teir bloavez ho po assuré en abondanç a bep traou ;
Qement a rancor da veva an oll a vo rejouisset ,
Guinis , segal ha peb had , tout e vezò marc'hat mad.

Qeme t vezò o commerci a vo oll rejouisset ,
O velet aué calonec , bep tristidiguez nac annui ,
Ebars e rouantelez Franç e vezò rejouissanç .

Un abondanç a faveuriou a zisqenno eus an èe ;
En em rejouissomp , bugale , Doue a royo deomp •
c'hraçou ;

Goulennet ountân pardon , ha pedet-èn a galon .

Na guemerit qet va c'homzou da fablenpou , mar querit ,
Qer guir emens lavaret , evel ma zeot abeg tri dez
Da vit Doue da repos en gloar ar Barados .

Hounes eo ar succession a dleac'h-hu da gaout ,
Evel ma meus dec'h lavaret , da Zoue e zoc'h guir
vignon ,

O soulagi ar beorien guez é zeot davitan d'e bales .
Pa voa achuet o parlant gant ur vodesti ar c'haera
E bisach carguet a joa evel an beaul a zeugas brillant
E guiscamant caér meurbet , an oll a voa soueset .

Ur c'houez an excellanta a lacas ebars an ty ;
Meulet ra viot , Mari , eürus brás eo tud an ty-màn
O velet ar vajeste ous a Jesus mab Doue .

En instant voa anavæzet , Jesus hon roue guirion
A roas e venediction da guement a voa assamblet ,
E presanç ar gompagninez e plign en èe gant an Elez .
An den- mât voa qen estonet gant qeun d'ar Ver-

c'hes Vari ,
Manfret e galon , na ell mui pa zonch piou en devoa
guëlet ,

Crial a re epad an nos : Mari , va c' hasset ganeoc'h.

Antronos vintin e varvas an den santel eurus-mân,
E ene gant calz a joa a ya da velet hor Zalver,
Entre daouarn ar Verc'hes sacr , pa en devoa dalc'het
e Mab.

E briēd hac e vugale gant laouenediguez bras ,
O deus batisset vap ar plaç ur chapel da vam hon Doue :
Ar Verc'hes a drugare a invoquer er plaç -se.

Ue nombr bras eus a viraclou a ra er plaç santel-mân,
Qement ya d'e bisita , oll e recevont e graçou.
Meulomp Jesus rouc an tron , ha Mari e vam guirion.

Didostait eta , Christenien , guir tud devot d'an
Verc'hes ,
Deut da recita bemdez ar chapelet e c'burunen ;
Grêt a bemzec bojet ros fleurissant er Barados.

Choui , Rouanez ar guerc'heset ha guir Vam d'an Doue
beo ,
Pedet evidomp betec ar maro , evit ma vezimp pardonet ,
Ma ellimp mont da repos , ha d'o meulier Barados.

FIN.



E Montroulez , e ti LÉDAN , e traon ru ar Yur.